


31  
92



# HISTOAR ADMIRABL

EUZ A VUEZ

# SANTEZ HELENA

Var ton : YAN GUERIN

C. G. R. M.

Brema fell din discleria  
Ar vuez Santez Helena :  
Beziñ attentif d'he c'hlevet,  
Ho calon sùr a vo touchet.

Clevet a refet e buez  
Carguet eus a dristidiguez,  
Hac a martir e devezs bet,  
Hac a zo ganti c'hoarvezet.

Me lavaro dec'h pen-da-ben  
E voa hi kaëra feumeulen  
A guement a vije cavet,  
Gant ar bed oll e voa enoret,

Beza voa vrassa qualite,  
Pa voa hi merc'h da eur roue :  
Rac merc'h voa d'ar roue Anton,  
E Constantinopl e voa e dron.

Pa voa Pap e Rom sant Clement,  
Ennes a voa eus e c'herent,  
E voe bars er bed-mâ ganet  
Er blaves pevar c'hant ha dec.

Goude an Incarnation  
A Jesus, hon roue guirion,  
Er guer deus a Constantinopl,  
Hac estimet bras gant ar bobl,

Pa voe en oad a bemzec vloas,  
He mam diganti a varvas,  
Ma fallas d'he zat e c'havet  
Evit ma vije e bried.

Mont a eure da gaout ar Pab,  
Hac en esper, kaout en c'hrat,  
Evit caout e gonsaut-mant  
Da zimezi d'he verc'h yaouanq.

Ar Pap neuze pa er c'hlêvas,  
A respont gant eur horror bras  
Pelec'h ma ar c'hristen var ar bed  
A guemerfe e verc'h da bried ?

Gant an ilis eo difennet,  
Ha gant Doue eo ordrenet,  
Na vezo james eureojet  
Eun tad de verc'h yaouanq.

E ve dimezet eur verc'h d'e zad,  
Ennez zo eur c'hrim execrapt ;  
Eur c'hrim a enep ar lezen  
Siouaz ! e touez ar gristenien.

P'e devoe clevet Helena  
Ec'h arruje sùr quement-mâ,  
Var ar môr en em embarquas,  
Hac en Flandrez en em rentas.

Eno pa voe hi arruet.  
En eun eclus en em rentet,  
Pa voe tost da eun abati,  
E commanças son ar c'hlec'hier.

Neuze an oll leanezet  
A voe querquent bras estonet  
O clevet ar c'hleyer o son,  
Hac int mont oll en orezon,

Pac int mont da zellet neuze  
Piou a voa eru er c'hontre,  
Ma remergjont eur feunteun  
A zeue d'ho c'haout pen-da-ben.

Mont a rejont en procession,  
Gant respet a devotion,  
Evit monet d'he rencontri,  
Gant eur joa vras d'he saludi.

Hæ pa velas hi aneze'  
E voe estonet bras ive,  
Hac oc'h o guelet a vanden  
O tont d'he rancontr evellen.

Neuze resevjont anezi,  
Ha conduit d'an abati ;  
Rac guelet a rent oll certen,  
E care an Autrou souveren.

Mes na chommas quet pel gantel.  
E chenchas tima a gontre  
Dirac ar roue Catebron,  
Eun den cruel a dirézon.

Mont a eure var bord ar môr  
Evit sovetei e enor,  
Hac e pedas Merdaïdi  
Mar plich ganec h va embarqui.

Eun dra derrupl a erruas  
Pa voant e creis ar môr glas,  
Rag an dud oll a voa lazet  
Gant ar c'horserrien anraget.

Exreplet gant Helena  
E voa eur feumeulen ar gaëra ;  
O sonjal cavet e guerc'hdet,  
E voa hi gante reservet.

En orezon en em laquas,  
Da Jesus en em recommandas :  
M'ho ped, va Jesus, va roue,  
Conservet va virginite.

Pa voa achuet e feden  
D'hor Zalver Jesus evellen,  
Eun tan eus an ev a goesas,  
Al lestr hac an dud a lonquas.

Hi voe preservet gouscoude  
Gant eur planquen dre c'hras Doue  
Ec'h arruas er rivier Sign,  
E quichennic bord eur jardin.

Ar rivier 'ye betec Londrez,  
Hac eno e voa eur verjez,  
Hac eur feunteun gaër a gavas,  
En e c'hichen e tisquizas.

Ar roue Herri o guelas,  
Bars en eun dristidiguez vras,  
Azeet etal ar feunteun  
Ha ne voa den en e c'hichen.

Tostat a ra neuze outi,  
Hac e c'houlennas diganti :  
Livirit din presentamant  
A belec h oc'h merc hiq yaouaueq.

Me zo deus a Constantinopl,  
A guerent pinvidic ha nobl,  
Hac a zo ama achappet  
A dre daouarn ar barbaret.

Ah ? va c'halon e fazin din,  
Bac naon e m'eus ne all mui ;  
Pell bras z'o n'e mens débret tam  
Ha ma c'halon em c'hreis a rann.

Ar roue Herri p'e c'hlévas,  
D e aumonier a gommandas  
Monet profit da guerc'het dezi.  
Peadra vit e soulagi,

Neuse en e c'lassas gantâ  
Ebars en e di da loja,  
Hac o ton de recommandi  
Evel unan a dud an ty

Goude-se e voant demeset,  
Souden e voe gret an euret,  
Hac ar fest a badas gante  
Betec an nombr a truent den.

Daou vlaves antier ez int bed  
En o slijadur assuret,  
Quen en em gavas douguerez,  
Neuze e devoe goal vuez.

Digant e mam-gær, ar Zantez,  
E devoa cals a paourantez ;  
Herve ma rapport an histoar.  
E devoa calz deuz a c'hlac'har.

Ar roue Herri a yas timat  
Da gaout hon tad santel ar Pab,  
Evel m en doa recommandet,  
D ar gombat ouz ar Sarrazinet,

Lezel a eure en secret  
Tri verq er guer deus e gachet :  
Rei ras unan da Helena,  
Eun all da Vari Clocestra.

An drede neuze a roaz  
Da c'hont a voa e vignon bras,  
Da bini e recommandas  
E bried gant affection vras.

Glac har vras a voe er pales,  
A lavaret adieu assembles,  
Hac epad eiz vloas varnugent  
N en em velint sur e nep hent.

Helena e devoa ganet  
Daou vuguel a voa cær meurbet ;  
He man-gær a roas da gredi  
Penos e devoa bed daou guy.

Ar roue Herri pa glevas,  
A voe certain estonet bras,  
O clevet e devoa ganet  
Daou guy evelse e bried.

Neuze a voa c'hi condaonet  
Da gaoût e brec'h deo troc'het,  
Hac amaret e bugale  
Unan dezi a bep coste.

Ambarquet voe var ar mor bras,  
Ebars e Breiz e tisquennas,  
Al lestr devoa digasset,  
Da Londrez a zo returnet.

Cri vije ar galon na voelje,  
Oc'h e guelel nep a vije :  
O rei da zena d'he bugale,  
Hac hi prest da vervel digante.

Da gousquet pa en em laquas,  
Daou leon deus ar c'hoat e teuas  
Hac a gassas an daou vuguel :  
Quement-mâ certen voa cruel !

Eun Ermit a voa neuze er c'hoat,  
Ha dious ar c'hri e zeuas timat :  
Hac a gavas an daou vuguel,  
Etre griflou daou leon cruel !

Unan a nê Bric a hanvas,  
Eguile Martin a c'halvas.  
O daou o voant gantant maguet  
Epad c'hoesec vloas assuret.

Ebars epad an amzer-mâ  
E voe e Naonet Helena,  
Hac eun hostises a gavas,  
Truez outi a gemmeras

Chom a eure da zervicha.  
Ebars an ty voa an disterra ;  
Dispriset voa gant pep ini,  
Laquet voa da dorchalistri

Ober a re gant dilijanç  
Hep na rebel na repugnanc  
Quement a ordrenner dezi,  
Eno re oll hep contraignî.

Guelel amâ greg eur roue  
Carguet demeus a paourante,  
Rentet quen humbl a quen izel  
Dirag ar bed universel.

Sellit breman an humilite,  
Honnez a blich da Zoue.  
Rac an humbl a zo exaltet,  
Hac ar superb zo discaret.

Ar roue Herry a distro Rom  
Ha gantantan ar roue Anton,  
E erruas en e bales  
Ebars er gêr eus a Londrez.

Allas ! eno pa erruas,  
Ar c'hont Gloucester a gavas,  
Ha goulenn neuze digantâ  
Peleac'h voa eat Helena.

Nao message voa digasset  
Dirac ar roue da lavaret  
O doa digasset peb a lier  
D'ar c'hont Gloucester tra scler.

Mes eun all a zeuas goude,  
A lavaras ar virione  
Penos a voa bet trahisset  
Gant ar rouanez coz assuret.

Ar roue coz zo condaonet,  
Da vezan en beglosquet  
Abalamour ma devoa  
Laquet troc'h eus Helena.

Me lavaro deo an ar recit  
An daou vuguel hag an Ermit,  
Ha penos voa ar disparti  
Ebars er c'hoat gant cals a gri.

Ann Ermit var bord ar rivier  
A yeas gant an daou vuguel,  
Aman emezan o quivis  
Ganen d am zy tigassis.

An daou vuguel a respontas  
D'an Ermit oute pa gomzas.  
N en dê quet c houï ta ermit mad  
Eo a so a dra sur hon zad !

An Ermit neuze a lavaras ;  
Deze gant tristidiguez vras :  
Allas ! m ho cavas aman lezet  
Etre bleizi ha leonet.

Ha gant truez m'ho tigassas  
Ho taou ganen d'am ermitach,  
Hac emeus ivez ho maguet  
Hoc h elevet hac instruet.

An daou vuguel a lavare  
An eil d'éguille aneze ;  
Pa n'en dê an Ermit hon zad,  
Deomp ni brema da glasq ho mad

An Ermit a voe trist meurbet,  
Pa o c'hlevaz o lavarel  
E zajent, allas ! da glasq ho mad  
Pa na voa quet en voa o zad

Pa voant o tiscoursi evelse,  
Erruout Merdaïdi ene,  
Bremâ ez eus c hoeseq vloa  
E lequ-zomb ama Hel-na

Gant anquen vras disgonsolet  
De daou vuguel devoa collet,  
Ne devoa brec'h nemet unan  
Da zicour daou vuguel bian.

Neuze e lavaras Martin :  
Bric, va breur deomb beter fin,  
Elec h ma plijo gant Doue ho c'has  
Ma caviomp hor mam eur vech c'hoas.

Merdaïdi, ni o supli,  
Plijet guenoc h hon ambarqui  
Ma zeomq en hano Doue  
Da glasq hor bro hac hor c'hontre.

Ar Merdaïdi a respontas  
D'an daou vuguel pa o c'hlevas ;  
Deut en hon lestr hac ambarquet,  
Ni ho laquaï en douar assuret.

En Allemagn ec'h arrujont ;  
Hac archant dezo a rejont ;  
Ouspen a rejont da leinia  
D an daou vuguel, gant cals a joa.

En Bavier, pa oant arru,  
E zeont ho daou a ru da ru,  
Ma o guelas ar rouanes  
Ebars er ru deus e fales.

Ma gommandas d'e messenger  
Mont da guerc'het an daou vuguel,  
Rac quen caer oant evel an de,  
Clorianda o admire,

Digasset oant neuze dirazi,  
Rac t e voe dezi da zibri ;  
Neuze evel tud affamet  
Ne squizent o tibri o boed.

Re hir ve ma content entier  
Ar brezel voa er bro Bavier,  
Mes beza voant victorius  
An daou vuguel, dre c'hras Jesus.

Martin a voa eun den vaillant,  
Hac ebars er g'ombat sanglant  
Laha reas cals a Zarasinet  
Ha cals d'uz an Turquianet.

An Itron Varia Bouloigne  
O sicouras sur an deiz se,  
Hag evit caout ar victoar  
Dre c'bras Jesus voar an douar,

Da Dour e teujont ac'hane,  
Eur gær so en Tourene,  
Sant Martin a voa aumonier,  
Da rei soulach da beorien qer.

O mam ive e erruas  
En Tour gant eur baourante vras,  
Pa voa Martin o distribui  
An aluzon da pep hini.

Goulen a eure diouti :  
Pa deuas da zellet outi :  
Pe a lech oc'h hu dut ama ?  
C'houi n'en oc'h qet eus ar vro ma

Commanç a ras neuze e galon  
Da zonet d'e biquat quen don,  
Neuze e teuas sonch deza  
Ebars en e vam Helena.

Diaguent en devoa clevet  
Evel ma hon eus rapportet,  
E voe troc het eur vrec'h dezi  
Ha en dont da sonjal enni.

Neuze en em anavejont ;  
Gant joa vras en em saludjont :  
Autrou Jesus eme Helena,  
Va bugale gues a velan.

Ne zeziret quet quen mervel,  
Nemet gu-let va daou vuguel ;  
Ma bugalet meulomb Jesus,  
Zo bet n'omp addret trugarezus.

Autrou Jesus roue an Trôn,  
Homa zo consolation,  
Da eur vamp e devoa collet,  
He daou vuguel e deus cavet,

Pebez joa ive evit hi  
Guelet c'hoas ar roue Herri :  
Ar prin-se quen madelezuz,  
Quen humbl ha que carantezuz,

O Doue emei, ma fried,  
Goel bell e c'homb bet separet  
An eil siouaz ! diou eguile ;  
N'em go-lfet mui pell en bue.

Ha c'houi ma zad prias meurbet  
Vel pa vijen a re ho ty [cri,  
Oc'h eus bet occasionet  
D'ar poagno bras a meuz souffret.

Adieu dec'h oll a lavaran  
Galuet hon prim d'en em rentan  
Bremâ en pales ann envo  
En recompans d'em oll poanio.

Adieu ive, va bugale,  
Mont a ran breman en hano Doue,  
Ho pet ac hanon sonj a memoar,  
Va bugale guer, var an douar,

M'em bezo sonch ac hanoc'h ive  
Pa vin en rouantelez an év  
Evit ma vesimp oll assambles  
Er barados gant an aëles.

(Propriété).

FIN.



## CANTIC AR BURETE



*Voar eun ton nevez*

Clevit oll yaouanquis, avison exellant,  
Tennet deus ar Scritur ar Zent, an tud savant.  
Vit dont da gonservi antier ar burete  
Hac ive ho brud vad e mesq tud ar c'hontre,

Eur paour gant he enor so muoc'h estimet  
Vit nobl a pinvidic m'ar bent dishenoret,  
Rac p'an nefe eun den oll vadon ar bed-ma,  
Birviquen an enor collet n'all prena,

Hoguen man an enor eo ar guir burete,  
Vel man an dishenor eo ar lubricite.  
Nep so cast a nevo estim oll dud ar bed,  
Hini Doue, ar zent, an æle biniguet,

Vetu ar chastete a neveus en avanç,  
A dalec ar bed ma atao he recompañ,  
Vel ma meus lavaret, mes he hini brassa  
Vo gloar ar barados hep biquen finissa.

Divoallomp hon sellou, dorojou ar galon,  
Hy ra antren ebars a bep sort sonjeson :  
Conduomp aneze gant eur vodesti vras,  
Evit conserv bepret ar vertu hac ar c'hrac,

E toues ar vugale, vel e mesq an dud vras,  
Ar fe, he han auzer, so divalo siouas !  
A boan a zeo deze gouzout ho *Be ha Ba*  
Ma canont chansoniou demeus ar re loussa.

Disquomp oll, christenien, ar voyen da viret  
Ar burete gorf hac ive a speret,  
Rac belamour ma zeo eur vertu ar gaera,  
An droug-speret a glasq bepret he distruja.

Satan a zo, ouspen, fin a traytour meurbet ;  
En dro deomp emedy gant he bechou stignet,  
Evel eur bleiz, nos de, he redec an devet :  
Divoalemp, me o ped, rac beza devoret.

Imitomp ar Verc'hes, Suzanna ha sant Yan,  
En eur guir, an oll zent evit beza divlam ;  
Hac ho Salver Jesus, sourcen ar burete,  
Er gloar hon curuno, hed an eternite.

En tuont, quemeront squoer deus ar verzerien,  
A heuillas er bed ma oll, hent ar binijen :  
Na neveys quet moyen da c'honit ar victoar,  
Ha da veza, eun de recompanzet er gloar,

A hent all re hir ve donet da rapporti  
Histoar an dud impur, ha re an dud impi  
Balthasar dre ar maro a so bet prompt squët,  
Ha Sodom ha Gomorh gan tan an ên devet,

Evit fin pelleomp deus an occasion ;  
Ra vo hon melezour, Samson ha Salomon ;  
Ar fura, ar c'hrenva a so deut da gonêa :  
Ha nin a gont beza fermoc'h bars eu hon zaâ !

Na neo quet necesser deomp e n'em separi  
Na demeus hon c'herent na demeus tud hon zy,  
Vit evel hermitet, monet bars er c'hoajou  
D'a ober pinijen ar rest deus hon deïou.

Er bed gant graç Doue, ha gant bolonte vad,  
Nin a kavo moyen vit en em sauvetaat :  
Ti homp deus ar pec'het, heuillomp an Aviel,  
Vel Jesus ; vit ganta mont d'ar gloar éternel !

Guerc hes Vari Mam vad, sicour ar pec'herien,  
Divoalet ac'hanomp deus hon adversourien,  
Gret ma vesimp atao pur, chast ha vertuos,  
Da c'hortos, en envo, ganec'h, meuli Jesus !

(Propriété)